

492 B (Edition non autorisée)



CHANSON

POTRET PLOUILLAU

Var ton : ADIEU, PONTREO

M'am bije speret da gompren, evel a meus fantâzi,
 Me a vije n'em impliet da zonet da gomposi
 Eur c'hiniat leun eus a'c'hlac'har, grêt da gons-
 crivet yaouanq,

O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.
 Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemp a vis
 guengolo,

E zeo digueet adare eus a baros Plouillau
 Tud yaouanq evit an arme tud eus ar re derrupla;
 Glac'haret ê o oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus qen nemet pêvar:
 Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Mele-
 dar,

Ha Yannic Prat eus ar Goajou ha Pipi an Aveant :
 Pêvar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vail-
 lant.

— 2 —

Er voanic Jacob a lare en deiz-se d'e gamarad :
Emâr zo un devez trist hac a ra dîn calonad !
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qèz de-
solet !
Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazi rannet.

Calz a sonchfe dè, marteze, penos e ven ur pol-
tron,
Em be aon rac un ten fuzuil pe rac ur vouled
canon,
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hent-
chou,
Pe gousqet var ur guele can ebars er c'hordegardou.

Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va
zabren,
Bale bemde a guêr da guêr dre ar fanq hac ar
vouillen ;
Ha goude e fin va beach rancout marteze campi,
Pe gousqet var an douar yen, pe otramant bivoaqi.

Tor o deus an neb a sonch se ; ma c'halent lenn
em c'halon
Evit guelet va bolonte ha va inclination ;
Ma na fottet nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten hon Impalaër, un tad qer carantezus !

Piou ne gombatfe qet hardi gant un Impalaër
christen !
Ur gaus qer just hae e hiri a zo facil da zouten,

— 3 —

Pa zomp memproù da Jesus-Christ, soudarded an
 Aviel,
 Bugale da Zoue an Tad, teimplou d'ar Speret-San-
 tel,

Arça eta, camaradet, qent quittat eus hor c'hontre,
 Demp-ni da illis Plouillau da suplia hon Doue
 D'or preservi demeus uoal chançh pa vezimp en ar-
 meou,
 Ha da gonsoli bars er guêr hon tadou hac hor mamou.

Adieu d'êc'h, Autrou Saint Millau, patron eus ar
 baros-mâ :
 Adieu, qerent ha mignonet, cessit brêmâ da vouela:
 Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign ac'ha-
 nomp.
 Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout e lec'h
 ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad desoiet;
 Piou a gonsolo da dud paour goude ma vi partiet?
 Pa vin accablet gant cœsni, me vo clêvet o laret :
 Ma vije va me mab qez er guêr, en dije va soulajet.

Clêvit ar vam o qimiadi ive digant e buguel :
 Deut amâ c'hoas ma c'hambassin ur vech qent
 eguet mervel ;
 Aben ma retorni d'ar guêr me vo êt eus ar bed-mâ
 Deus amàn etae va divrec'h evit ar vech diveza.

— 4 —

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet d'ar
billet,
Bemnos vel ma fo din cousquet, me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant, va eur chariot
blesset ;
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar soudard yaouanq contristet, c'hoas qent eguet
partia,
Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela :
Tavit, va zad ha va mam baour, ha bevit en
esperanç :
Doue, tad a visericord, a so bras e Brovidanc.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gant graç Doue hac ar Verc'hes, e vezo fin d'ho
clac'har ;
Evit merq eus hor vaillantis gant lore deus hon tocou,
Ni a zistroyo prest d'ar guêr evit sec'hi ho taelou.

Adieu da baros Plouillau ha d'e oll habitantet,
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha qerent, ha mignø-
net :
Ha ma na nemp qet ar boneur er bed-mâ d'en em
velet,
Graz deomp ebars er Barados assambles d'en em
gavet.

FIN